

*Tirage différent d'Ollivier*



## CHANSON

# MARIE-LOUIS,

Var ton : *Fantic Coant*

**M**E ho ped, Bretonet, da laqat ho speret  
Da glèvet eup chanson a neve compost,  
Zo grêt da zaou zen yaouanc, var ton Chanson  
Fantic Coant.

A zo eun ton charmant evit an dud yaouanc  
Cavet meus eur sujet da ober eur chanson,  
Grêt da zaou zen yaouanc n'eur garie a galor  
Composet d'ar garante certen e voâ entreze  
Contant e voant da verval an eil evit eguiile,

An daou zen-mâ a ro dan oll tud da velet  
Ar garante barfet a dleont da gavet,  
Evel ma eo ordrenet gant an autrou Doue  
N'or bo oll carante an eil evit eguiile,

Ne grêdan qet e ve sur cavet er bed-mân  
Eur plac'h hac a rofe evel e deus grêt oumân,  
A güitafe e moyen, e c'hérent hac e c'hanton  
Evit mont d'ar brezel da heuill e guir mignon.

Ili a voa'r-rouanez eus ar merc'bed yaouanc  
A gomzer aneze en pêvar c'horn ar Franc :  
N'oa nemet eur baysantez, a zo casset d'ar palez;  
Zo presantet d'ar Rose i-e d'ar Rouanez.

Hi zo sourdilizen ann o l merc'hed yaouanc,  
Coulz en e honestis vel en e c'homporta na nt,  
Zo bet eiz vlas er brezel e servich ar roue,  
Güisget vel eur soudart, den ne anaveye.

Hac ouspen an draze, e vijé o repos,  
Gant e brassa mignon hi a gousqe bemnos,  
Epad eiz blas antier eo bet gantàn en arme,  
Ha bemnos e cousqe gantàn eus e goste.

Nac a botret yaouanc a zo bet glac'haret,  
E siout er merc'hed zo n'en gavet trompet !  
Pa sònjent bea caret, e vijen abandonnet,  
E choment glac'haret hac ive chagrinet.

Houmâ ne deus qet gr't evel a ra'r seurt-se  
Hi e deus dalc'het mad certen d'e c'harante,  
Da YANNIC, e amourous, a gare a vir galon.  
Contant voa da vryel evit e guir mignon.

Güelomp eto, MARI, g'elomp an occasion  
A zo bet cos d'e h-hu da güittât ho canton  
N'oa nemet ar garante ho poa evit o mignon  
Hac a voa sur gravet ebars creiz hò calon.

Pa vije'n daou zen-mâ d'ar zul en o farres,  
N'eur gavent assembles da barlant alies ;  
Eur garante ar vrassa a voa certen etreze ;  
Vel ma cl' fot er fin, voa bras o amitie.

Eun dezir ras o doa, ma permetje Dœue,  
E vijent unisset an eil gant eguile ;  
Urz ar Roue' empeche, ne fotet nemet eiz de.  
Pa deuas an ordrenanç da zervich ar Roue.

D'ar zul en ofern bret e rannas e c'halon,

Pa glèò an ordrenanç a lenne ar Person :  
Ha c'houi gl'o, emezàn, cetu ama'n ordrenanç  
E rànqer soudardet evit ar Roue Franç,  
Ha perme tet e ve, eme an den yaouanq,  
E ve ret din quittat eur vignonez quer coant !  
Eur vignonez a gàran gant qemant a garante,  
Ilac a rancàn quittat evit mont d'an arme !

E sorti ar èred e rancontras e blac'h,  
E galon chagrinet ha goal glac'haret bars,  
Petric c'heus-te, amezi, me vel ont chagrinet.  
Allas ! va mignonez, ho quittat a va ret !...  
Iennet é an ordrenanç evit ar zoudardet ;  
Me garje birvigen n'am bije ho quelet.

Allon, va mignon quer, eme ar plac'h neuze,  
N'eus quer a zizenor e servich ar Roue,  
Mar bez soudart vaillant ha nom pas eur poltron,  
Te vo recompancest gantar Roue Bourbon.

Contant e ven, MARI, da vont sur d'ar brezel  
Penevert ma rét, va douç, o tilezel :  
Ta me a ve contant da vervel en arme,  
Ma c'halfen soupçoni vec'h infidèle din-me.

Ve a vel va mignon, penos sur em c'hares  
Ne golli quer da boan : me a vo da vêstros,  
Ne anc quer da serifa din pa wi en da rejman,  
Ha te velo neuze querqent a santimant.

Dalit, MARI-Louis, cetu eun diamant,  
A zo en aour melen, a rôan d'ec'h en presant,  
Zo test d'ar garante e meus, va douç, evidoc'h  
Birvigen, va mestrez, ne garin nemedoc'h.

Partial' ra neuze da vont d'e rejimant.  
Vardro daou is gonde e scrit d'e vestrez eoant  
*Me a zo em rejimant contant vel eur Roue ;*  
*Mes ho quelet, va douç, a garfen, va Done.*  
Qerqent vel ma clèvas e voa er rejimant,  
Hac hi monet dre fres da güemeret arc'hant ;  
Qemier a ra tri c'hant scoët, mont a ra Bors-  
Louis,

Goude bea gisqet habillamant boure'lis.  
Qerqent e mân en hent evit mont dan Naonet.  
E lec'b ma voa YANNIC, e mignon angajet.  
Pa voe ta éruet er gaer gaér an Naonet.  
Comz eus ar c'habiten ractal e deus c'hoantet,  
Bonjour, Autrou, amezi, a c'houi a angajfe  
Eun den a zo contant da zer icha'r Roue ?

Evel me voa güisqet e guis eun den yaouanq,  
Ractal voe angaget ebars e rejimant ;  
Ha tri devez goude voe laquet en faction  
Dirac ar c'hordegard ma voa e güir mignon,  
Neuze er saludas gant eur güir re veranç,  
Evel mâ è dleet da eur zoudard a Franç,  
Hac er memes nosvez eus e geste e couscas,  
Hep cavet nep soupçon e voa oumân eur plac'h.

Güelit ar garante euz an daou zen yaouanq ;  
Epad eiz vlas antier m'int bet er rejimant,  
Biscoas assur na zouetas e voa oumân e vestrez,  
Hac e vije bemnos cousset eus e gestez.

P'oé éru an amzer d'a gavet e c'honje,  
Hac hi mont da gavet e c'habiten eun de ;

Cetu èchu va amzer, Autrou roit d'in va c'honje,  
Evit ma zin d'ar guêr Goude servich ar Roue.

Me a c'houlen ouzoc'h e'hoas eur zoudard yaouanq,  
Zo èchu e amzer ebars ho rejimant.

Zo va c'hamarad guelet a garàñ a wir galon,  
Evit ma imp hon daou assambles d'hor c'hanton.

Neuze-ta ar c'habiten a zinas daou gònje,  
Evit distrei d'o pro goude servicha'r Roue ;  
Evel ma yent gant an hent, hi a gane goal gy^ :  
Allòn, ni zo tost d'hor brô, va douç va c'ha ente,

Pa voent êru tost d'ar bourg, qent antren en o  
c'hær,

Hac hi da lavarat neuze d'e zervicher :  
Ne c'heus-te qet er vrô-màn, emei, eur estrez  
coant,

A behini e comzes pa voas er rejimant ?

Allas ! eo-da, emeàñ, n'eur sq i var e galon,,  
Me meus sur er vrô-màn va doucic MARION.

Zo caus òn glac haret oll aboe m'on angaget :

Tremenet è an eiz vlas ne meus-i qet güclet.

Te a Javar gaou, emei ; sell ervat ouzòn-mé :  
Me a zo MARI-Louis, da zouç da garante,

A zo bet epad eiz vlas eus da heuil en arme,  
Hac a zo bët bemnos còusquet eus da goste.

Ha te vel, va mignon. amàn an diamant

A poa-de roet d'in-me qent mont d'ar rejimant ?

A voa test d'ar garante a poa evidon-me lares:  
Güelet ec'h eus certen meus evidout ive,

Perac eta MARI, pa voas er rejimant,  
E lezes va c'halon en glac'har en tourmant ?  
Rac me meus de garet certen dre güir garante,  
Mes mui a caran c'hoas sur an Autroue Done.

Ilou-ta va mignon, demp da di ar person  
I'a me a-ya brëma da gonta va r'son :  
Va c'hentel a ze studiet, me en laqai estonet.  
Arteze biscoas plac'h n'en deus-an quer spontet.  
Allon, Autrou Person, eme MARI-LOUIS,  
Hastit en em guempen da vonet d'an ilis ;  
Ni zo daou zoudard yaouanq o tont deus an arme,  
I'a c'houi renq demezi an eil gant eguile.

Ha ! ha ! eme'r Person cetu eur c'hoari sot ;  
Biscoas u'em boa clëvet voa demeet daou bot.  
Nan, han eme'r Person, me acrifo d'an Escop  
Qent ma en oblijet da eureuji daou bot.

Dalit, Autrou'r Person cetu daou gònje mat.  
Br mä me ya d'ar gu'r evit chench va dillat ;  
Ni z'on daou eus ar baros, me a zo MARI-LOUIS,  
Zo ganet er bourg-män, badet en hon oc'h Ijis.

Ah ! ia eme'r Person me voar piou out brëmä ;  
Me rayo da eured, ne gousto dit netra ;  
Me a scifo d'ar Roue, evidout, MARI-LOUIS,  
Ha te po an enor da vonet da Baris.

Pa oent bet demeet, e sacrificas da Baris,  
Ar Roue a c'houlen cass deàn MARI-LOUIS ;  
Nê nemet eur baysantez, mes mont a ra d'ar palez  
Presantet d'ar Roue coulz ha p'ar Rouanez.

Ha pa ea dirazàn e presant e c'honje :  
Ia, Sire emezi, me zo bet en arme ;  
Gout a ràn an exercic ha mania ar zabren,  
Ha laqat da dehel meur a adversourien.

Ar Roue mad neuze neus-hi recompencet,  
Vel eur soudard vaillant en devoa meritet,  
Rac-se merc'het yaouanq, redit oll d'an arme,  
Hae ho po recompanç ive gant ar Roue. *Fin*



## SON

# HERRI PÈVAR ROUE FRANC

*Var an èr gallec.*

**N**a pebes Roue  
Eo bet Herri goechal !  
Coulz a ell bale :  
Mes nicun en tu all  
Ne vezо guelet  
En Franc nac en lec'oh all.

Ar Roue Herri  
A voa eur pot dious-tu,  
A garrie hardi  
E JANNED ha giun ru,  
Hac ho combatti  
A vouie cregui dru.

E creis ar gombat  
E comzas evellen :  
Dalc hit ho lagad  
Var va flumachen ven,  
Sur eo d'o laqat  
Bepred er guir rouden.

Herri a garrie  
An dud divar ar mēz,  
Hac a reqete  
L'o dije bep sulvez  
Yar er pod deze  
Da zebri en ho èz.

Herri pêvare  
N'en deo qet maro c'hoas  
Rac e vugale  
E ligne hac e raç  
Zo leun a vue :  
Graç deo da chom hiel blosas.

Mar distro bïgen  
An diaoul da c'hoari vas,  
Guest omp da zouten  
Ar Roue en e blaç  
Ha prest ha laouen  
Da rei peb a dol bas.

FIN.